

KENTELIOÙ BREZHONEG

War ar Radio

Sizhun IX

SIZHUN IX
DEBRIÑ
KENTEL 1
AN TI-KRAMPOUEZH

M = Marivon

F = Fañch

Y = Youenn

(WAR RIBL AR STRAED, KLEVET A REER KIRRI O TREMEN)

F - Demat dit Marivon, mont a ra ?

M - Mont a ra...Ha ganit Fañch, penaos 'mañ kont ?

F - Emaon o vont da zebriñ krampouezh aze, dont a ri ganin ?

M - Da di Youenn ?

Met ar gwener emaomp ha bep gwener e vez leun an ti a bratikoù !

F - Gast ! Youenn a gavo un daol evidomp; alies a-walc'h e vezan eno o tebriñ.

M - Emichañs e vezer servijet buan rak pres a zo warnon.

Un emgav 'm eus e ti ar perukenner da ziv eur.

F - Kreisteiz ha kard eo, amzer e-leizh hon eus da zebriñ e-ser ober kaoz.

M - Deomp neuze !

(DOR UR STAL O TIGERIÑ HAG O SERRIÑ)

F - C'hwezh vat a zo amañ Youenn !

Hag un daol vihan staliet brav ho peus evidomp hon-daou ?

Y - Ur cheorenn all c'hoazh Fañch !

An daol e-lec'h ma vezit dalc'hmat a zo dieub du-hont, er c'horn.

(TROUZ KADORIOU)

M - War ar seblant e vezez amañ alies ha gant merc'hed bep tro war ar marc'had !

F - Youenn a vez beg bras atav met gwir eo, plijout a ra din dont amañ.

Kras e vez ar c'hrampouezh ha buan e vezont servijet.

M - Mat, pe seurt emaomp o vont da gemer ?

Met laosk ma gar 'ta !

GERIAOUEG

cheorenn*, ar ch. -ed
jolie fille
c'hwez*, ar c'h. -où *odeur*
gar*, ar c'h. divhar/divesker
jambe
gast*, ar c'h. gisti *prostituée*
kador*, ar g. -ioù *chaise*
krampouezh, ar c'h.
(s. -enn* ar g.) *crêpe*
taol*; an d. -ioù *table*

emgav, an e. -ioù
rendez-vous
kard, ar c'h. -où *quart*
karr, ar c'h. kirri *voiture*
korn, ar c'h. -ioù *coin*
pratik, ar p. -où *client*
pres, ar p. *hâte*
ribl, ar r. -où *bord, rive*
tl-krampouezh, an t.
tier-k. *crêperie*

Kreisteiz ha kard eo. Il est midi et quart.
Dont a ri ganin ? Est-ce que tu viens avec moi ?
Da di Youenn ? Chez Youenn ?
Pres a zo warnon ! Je suis pressé !
Plijout a ra din. Ca me plait; j'aime bien.
C'hwezh vat a zo amañ ! Ca sent bon ici !
War ar seblant. A ce que je vois; à ce qu'il paraît; on dirait que...
War ar marc'had ! Par dessus le marché !
Youenn a gavo. Youenn trouvera.

Amzer e-leizh hon eus da zebriñ e-ser ober kaoz.
Nous avons largement le temps de manger tout en discutant.
An daol e-lec'h ma vezit dalc'hmat a zo dieub du-hont er c'horn.
La table où vous avez l'habitude de vous installer est libre là-bas dans le coin.

dieub libre

kras desséché
(par le soleil etc),
grillé (pain, crêpe)

kavout kavet trouver
leuskel laosket laisser
ober (graet) kaoz
discuter
plijout plijet plaire
seblantout seblantet
sembler
servijout servijet
servire
staliañ staliet installer;
mettre le couvert

vezan je suis
(forme d'habitude)
vezez tu es
(forme d'habitude)
vezit vous êtes
(forme d'habitude)
vezont ils sont
(forme d'habitude)
vezer on est
(forme d'habitude)

'm eus j'ai
hon eus nous avons
ho peus vous avez

bep tous les...,
chaque
bep tro
chaque fois
dalc'hmat
constamment,
toujours
e-lec'h
à la place de
e-leizh
beaucoup
en quantité,
en abondance,
e-ser tout en,
par la même
occasion
evidomp
pour nous
ma que, où
warnon
sur moi
hon-daou
nous deux

SIZHUN IX

KENTEL 2

AR PIKNIK

(TROUZ UN OTO O TREMEN)

Ch = Channig

G = Gwenole

- G - Gast ! Chann, pegen brav e vimp amañ o tebriñ dirak ar mor, e-touez ar gwez hag al laboused !
- Ch - Ya, ha war-vord an hent bras, e-kichen ur boubelenn c'hwez fall...
- G - Met petra a zo c'hoazh !
Ingal e **vezez** imoret fall pa 'z eomp da biknikañ !
Dav eo kemer an traoù war o zu mat.
- Ch - Marteze e **vezan** imoret fall met sell ivez e pelec'h e **vezomp** degaset ganit bewech !
- G - Ale, arabat deomp klask trouz !
Debromp atav ha goude ez aimp da bourmen pelloc'h.
Petra 'teus fardet deomp ?
- Ch - Vioù poazh-kalet, tomatez ha kig-morzhed gant bara.
- G - C'hoazh, bewech e **vez** ar memes meuz pa 'z eomp da biknikañ !
- Ch - Marteze met bewech e rankan-me fardañ ar pred.
- G - Ale Channig, n'eo ket ken gwazh-se memestra !
- Ch - Ya, an Aotrou a **vez** re sammet gant e labour, sañset !
Pe neuze ez a d'an davarn gant e gamaladed hag aze e **vezont** eurvezhioù-pad oc'h evañ banneoù.
- G - **Ne vezan ket** ken alies-se.
- Ch - Mont a ra unan skuizh gant ar vuhez-se !
- G - Ne soñjez ket ar pezh a lavarez.
Emaon o vont da sikour tennañ ar boued diouzh ar c'houlr.
- Ch - Arabat dit !
Emaout o vont da veskañ pep tra !
- G - Morse ne **vezez** kontant !

GERIAOUEG

eurvezh*, an e. -ioù
durée d'une heure
imor*, an i. -ioù *humeur,*
disposition d'esprit
pobelenn*, ar b. -où
poubelle
tavarn*, an d. -ioù *taverne,*
auberge

aotrou, an a. -ez/-ien
monsieur
bara, ar b. -où
(u. un tamm b.) *pain*
boued, ar b. -où *nourriture*
kamalad, ar c'h. -ed
camarade
kig-morzhed, ar c'h. -où
(u. un tamm k.) *jambon*
labour, al l. -ioù *travail*
meuz, ar m. -ioù *met, plat*
pad, ar p. *durée*
piknik, ar p. -où
pique-nique
pred, ar p. -où *repas*
tu, an t. -où *côté; parti*

Dav eo. *Il Faut.*

An hent bras. *La grand route*

C'hwez fall. *Une mauvaise odeur.*

Vioù poazh-kalet. *Des oeufs durs.*

Eurvezhioù-pad. *Des heures durant.*

Bezañ imoret fall. *Etre de mauvaise humeur.*

Pegen brav e vimp amañ ! *Qu'est-ce qu'on va être bien ici !*

Bewech e rankan-me fardañ ar pred ! *C'est toujours moi qui doit préparer le repas !*

Mont a ra unan skulzh gant ar vuhez-se ! *On se fatigue de vivre cette vie-là !*

Met petra zo c'hoazh ? *Mais qu'est-ce qu'il y a encore ?*

Ne soñjez ket ar pezh a lavarez ! *Tu ne pense pas ce que tu dis !*

Dav eo kemer an traoù war o zu mat. *Il faut prendre les choses du bon côté.*

Ne vezan ket ken alles-se ! *Je n'y suis pas si souvent que ça !*

Morse ne vezez kontant ! *Tu n'es jamais contente !*

Ingal e vezez imoret fall pa 'z eomp da biknikañ !

Tu es toujours de mauvaise humeur quand on va pique-niquer !

Sell e pelec'h e vezomp degaset ganit bewech !

Regarde où est-ce que tu nous mène chaque fois !

Bewech e vez ar memes meuz pa 'z eomp da biknikañ !

C'est toujours le même menu quand on va pique-niquer !

kalet *dur* fardañ fardet
préparer (à manger)

poazh *cuit* meskañ mesket
mélanger, mêler

piknikañ pikniket
pique-niquer

rankout ranket *devoir*

sammañ sammet *charger*
prendre une charge

soñjal soñjet *penser*

vezomp *nous sommes*
(forme d'habitude)

ez a il/elle *va*
ez eomp *nous allons*
ez aimp *nous irons*

vimp *nous serons*

bewech
chaque fois

e-touez *parmi*

gwazh *pire*

ken gwazh (ha)
aussi mauvais,
aussi mal (que)

morse *jamais*

sañset
à ce qu'il parait,
à ce que l'on dit

SIZHUN IX

KENTEL 3

BOUED MOD BRO CHINA

E = Erwan

L = Lenaig

L - "Ti an Aerouant Ruz", boued a Vro-Sina.
Deomp e-barzh !
Amañ e vez debret mat.

E - Hag alies e vezez o tebriñ amañ ?

L - Ne vezan ket, ur wech an amzer memestra, evit cheñch.

E - Ha petra 'vez debret en ti-mañ ?

L - A-bep seurt !
Sell ! Setu ar roll... Nem-où da skouer !

E - Ha penaos 'ta 'vez fardet da nemoù ?

L - O ! Gant ur seurt krampouezhenn e vezont graet, legumaj ha kig enni, rollet ha fritet.

E - Ale, me 'lavar dit !
Krampouezh a vez du-mañ ur wech ar sizhun !
'Teus ket un dra egzotekoc'h da ginnig din ?

L - Petra a vez c'hoazh ?
Soubenn, riz mod Kanton, kig moc'h gant karamel...

E - Memestra, alies a-walc'h e vezomp o tebriñ soubenn, ma gwreg ha me, ha riz
ha kig moc'h !

L - Alato ! Amañ n'eo ket soubenn evel er ger eo a vez kinniget, na fourmaj rouz !
Ha lavar din, ha boazet oc'h, da wreg ha te, da zebriñ ho riz gant bizhier-koad ?

E - Ket, gwir eo n'omp ket boazet...

L - Gwelet a rez neuze.
Deomp e-barzh !

E - Deomp neuze !
Hag emichañs e vez graet ar bizhier gant koad egzotek !

GERIAOUEG

bazh*-koad, ar v. bizhier-k.
bâton, baguette de bois
legumaj, al l. (s. -enn* al l.)
légumes
riz, ar r. (s. -enn* ar r.) *riz*
soubenn*, ar s. -où *soupe*

aerouant, an a. erevent
dragon
fourmaj rouz, ar f. *pâté*
karamel, ar c'h. -où *caramel*
kig moc'h, ar c'h.
(u. un tamm k.) *viande de porc*
nem, an n. -où *nem*
roll, ar r. -où *liste, catalogue;*
ici menu

Ti an aerouant ruz. *La maison du dragon rouge.*
Deomp e-barzh ! *Entrons ! (Allons à l'intérieur)*
Evit cheñch. *Pour changer.*

Me 'lavar dit ! *Je ne te dis pas ! Je ne te raconte pas !*
Lavar din ! *Dis moi !*

Boazet oc'h ? *Vous avez l'habitude ?*
N'omp ket boazet. *Non, nous n'avons pas l'habitude.*

'Teus ket un dra egzotekoc'h da ginnig din ?
Tu n'as rien de plus exotique à me proposer ?
Hag emichañs 'vez graet ar bizhier gant koad egzotek !
Et j'espère que les baguettes sont faites en bois exotique !

boas habitué,
accoutumé

egzotek
exotique

bezañ boas,
bezañ boazet
avoir l'habitude

fritañ fritet *friter*

kinnig kinniget
présenter, offrir

rollañ rollet *enrouler*

a-bep seurt
de toute sorte

alato !
interjection pour
interpeller

mod à la mode de,
à la manière de

SIZHUN IX

KENTEL 4

EN DAVARN

F = Fañch

E = Erwan

F - Ac'hanta kenderv, petra 'po ?

E - Chouchenn, chouchenn a evan pa vezan e Breizh !

F - Ma, daou vannac'h chouchenn, neuze !
Emaon o vont da c'houlenn.

E - Gortoz, din an droiad kentañ atav, te oar mat !
Ostiz, me ho ped ! Ostiz !

F - Hopala ! Amañ ne vezer ket boas da huchal evel-se !
Amzer 'zo kenderv !

E - Gwir eo, bewech e lavarez din "amzer 'zo" pa vezomp asambles.

F - Alies e vezez techet d'ober amañ evel en Amerika.
Sioul e vezit c'hwi, amerikaned ur wech bennak ?

E - Me, un amerikan n'on ket 'vat !
Met gwir eo e vezont prim ar re-se peurliesañ, ha techet e vezer d'ober evelto pa
vezer en Amerika.

F - A, emañ an ostizez o tont.
Daou vanne chouchenn mar plij ganeoc'h.

E - Ne vez ket mall war an dud, amañ evelato.
Fresk e vez servijet ar chouchenn, hag amzer gortoz ar banneoù e vezont klouar pa
erruont war an daol !

F - Me, pa vezan en davarn e ouzon gortoz.
Gra evelton pa vezez er vro 'ta !

E - Pet eur eo ?

F - Peder eur hanter, ha brav an amzer !

E - Pemp munutenn 'zo emamp o c'hortoz.
A ! Emañ hor banneoù o tont !

F - Anat dit !

E - Ha fresk eo ar chouchenn !
Brav ar vuhez !
En hor bleud e vezer amañ e Breizh !
A, ar chouchenn !

E - Ne vezomp mui boas da evañ chouchenn ken amañ.
Gwin pe bier a vez servijet d'an dud peurliesañ.

- F - Ha klañv e vezit ganto !
Padal, gant ar chouchenn...
C'hwi bretoned ho peus disoñjet eo e Breizh emaoch o chom !
- E - Ha c'hwi Amerikaned, begoù bras atav !
Ma, ur banne all 'po ?

GERIAOUEG

Breizh* Bretagne	anat évident	e ouzon je sais	evelato
chouchenn*, ar ch. hydromel			cependant
munutenn*, ar v. -où minute	mall hâte, presse,	e lavarez tu dis	
ostizez*, an o. -ed aubergiste,	vitesse		evel don
serveuse, hôtelière...		Gra ! impératif de	comme moi
troiad*, an droiad -où tournée	prim vif, rapide	ober 2d pers. sing.	
		Fais !	evelto
Amerikan, an A. -ed Américain			comme eux
bannac'h V. banne		bezañ techet (da)	
bleud, ar b. -où farine		être enclin à	padal
gwin, ar g. -où vin			cependant
kenderv, ar c'h. kendirvi		bezañ en e vleud	
cousin		se sentir à l'aise	peurliesañ
ostiz, an o. -ed aubergiste,			le plus souvent
serveur, hôtelier...		goulenn goulennet	
		demander	ur wech
ar re-se ceux-là			bennak
		huchal huchet crier	quelquefois

Anat dit ! C'est une évidence, évidemment, ça crève les yeux...

Te oar mat ! Tu sais bien !

Gra evel don ! Fais comme moi !

Petra 'po ? Qu'est-ce que tu vas prendre ? (Qu'est-ce que tu auras ?)

Ur banne all 'po ? Tu prendra autre chose ?

Din an droiad kentañ ! La première tournée est pour moi !

Me ho ped ! Je vous prie, je vous en prie (langage soutenu)

Bewech e lavarez din... Tu me dis toujours (tu dis toujours à moi).

Ha klañv e vezit ganto ! Et ça vous rend malade !

Disoñjet ho peus... Vous avez oublié...

Amañ ne vezer ket boas da huchal evel-se !

Ici on n'a pas l'habitude de crier comme ça !

Ne vez ket mall war an dud amañ ! Les gens ne sont pas pressés ici !

Chouchenn a evan pa vezan e Breizh !

C'est de l'hydromel que je bois quand je suis en Bretagne !

Fresk e vez servijet ar chouchenn, hag amzer gortoz ar banneoù e vezont

klouar pa erruont war an daol !

L'hydromel ça se sert frais et le temps qu'ils nous le serve, il va être froid quand il arrivera sur la table !

Ne vezomp mui boas da evañ chouchenn ken amañ.

Ici, on n'a plus l'habitude de boire de l'hydromel.

SIZHUN IX

KENTEL 5

AR MEKANIK-KAFE

Dor-zigor a zo er skolaj. Deuet eo tad-kozh Yannig da welet e vab bihan;

hemañ a fell dezhañ paeañ ur banne d'e dad-kozh...

Y = Yannig

T = An tad-kozh

(TROUZ SKOLAJIDI O VONT HAG O TONT EN TREPASOU)

- Y - Dek eur eo !
Deomp da evañ ur banne kafe !
Ur mekanik zo en trepas.
- T - Ur mekanik ?
Atav e vez sac'het ar seurt ardivinkoù diaoulek !
- Y - Dec'h ez ae mat en-dro c'hoazh.
Boas omp d'ober gantañ.
- T - Me, ne evan ket kafe, forzh penaos.
Klañv e vezan gant an evaj-se.
- Y - Traoù all a zo : chug-frouezh, chokolad, soubenn hag all.
Ha mat e vezont peurliesañ !
- T - Mat ?
Ha ne vezit ket klañv gant traoù kimiek evel-se ?
- Y - Me ne vezan ket klañv ken buan-se !
Ha pa 'z eur boas...
C'hwi 'welo !
Chokolad neuze ?
Ne vezit ket klañv gant ar chokolad memestra !
- T - Atav e vezit oc'h ober goap ouzhin !
Ar re gozh ne vezont ket selaouet mui gant ar re yaouank !
- Y - N'eo ket gwir !
Ur banne soubenn domm a yelo ganeoc'h ?
- T - Pegement eo ?
Ni tud kozh n'omp ket pinvidik.
- Y - Hag atav e vezit sec'hedik... Chokolad neuze ?
- T - Ha laezh-ribod a vez kavet er mekanik ?
- Y - Laezh-ribod ?
- T - Du-mañ ez eur boas da evañ laezh-ribod da zek eur vintin.
- Y - Biskoazh kemend-all !
Ne vez ket laezh-ribod er mekanikoù tad-kozh !

GERIAOUEG

dor-zigor* , an n. -ioù-d. <i>porte ouverte (journée)</i>	diaoulek <i>diabolique</i>	a yelo ira	dezhañ <i>à lui</i>
ardivink , an a. -où <i>machine, mécanique</i>	pinvidik riche	ez ae allait	gantañ <i>avec lui</i>
chokolad , ar ch. <i>chocolat</i>	sec'hedik <i>assoiffé, qui a soif</i>	fellout (da) <i>fellet (da) vouloir</i>	ouzhin <i>contre moi</i>
chug-frouezh , ar ch. <i>jus de fruit</i>	yaouank jeune	mont en-dro <i>aet en-dro fonctionner</i>	
evaj , an e. -où <i>boisson</i>		ober gant <i>graet gant se servir (de qq chose)</i>	
goap , ar g. <i>moquerie</i>		ober goap (ouzh) <i>graet goap (ouzh) se moquer (de)</i>	
laezh-ribod , al l. <i>lait ribot</i>		paeañ paeet payer	
mab bihan , ar m. <i>mibien b.</i> <i>petit fils</i>		sac'hañ sac'het <i>ne plus fonctionner, être en panne</i>	
mekanik-kafe , ar m. -où-k. <i>machine à café</i>			
skolaj , ar s. -où <i>collège</i>			
skolajiad , ar s. <i>skolajidi</i> <i>collégien</i>			
trepas , an t. -où <i>couloir</i>			

Dor-zigor a zo er skolaj. *C'est la journée porte ouverte au collège.*

Ar re gozh. *Les vieux.*

Ar re yaouank. *Les jeunes.*

Ar re gozh ne vezont ket selaouet mul gant ar re yaouank !

Les jeunes n'écoutent plus les anciens !

Atav e vez sac'het ar seurt ardivinkoù diaoulek !

Ces sales machines sont toujours en panne !

Atav e vezit oc'h ober goap ouzhin ! *Vous vous moquez toujours de moi !*

Dec'h ez ae mat en-dro c'hoazh ! *Hier, elle fonctionnait bien encore !*

SIZHUN IX

KENTEL 1.2.3.4.5

YEZHADUR/GRAMMAIRE

BEZAÑ - AR STUMM BOAZ/LA FORME D'HABITUDE

Ex : **War ar seblant e vezez amañ alles.**
Apparemment tu viens souvent ici.
Emichañs e vezer servijet buan rak pres zo warnon.
J'espère qu'on sera servi rapidement car je suis pressée.
Chouchen a evan pa vezan e Breizh.
Quand je suis en Bretagne je bois du chouchen.
Ne vezomp mui boas da evañ chouchen ken.
Nous n'avons plus l'habitude de boire du chouchen.

Nous avons vu dans le chapitre précédent que le verbe être a une forme fréquentative "**vez**" pour exprimer, l'habitude, la durée, la répétition, la continuité.

Voici le tableau de conjugaison de cette forme fréquentative à toutes les personnes :

Sujet en tête de phrase	Complément ou attribut devant le verbe	
me a vez amañ alles te a vez amañ alles eñ/hi a vez amañ alles ni a vez amañ alles c'hwí a vez amañ alles Int a vez amañ alles	alles e vezan amañ alles e vezez amañ alles e vez amañ alles e vezomp amañ alles e vezit amañ alles e vezont amañ alles e vezer amañ	<i>je suis ici souvent</i> <i>tu es ici souvent</i> <i>il/elle est ici souvent</i> <i>nous sommes ici souvent</i> <i>vous êtes ici souvent</i> <i>ils/elles sont ici souvent</i> <i>on est ici souvent</i>
A la forme négative		
ne vezan ket amañ alles ne vezez ket amañ alles ne vez ket amañ alles ne vezomp ket amañ alles ne vezit ket amañ alles ne vezont ket amañ alles ne vezer ket amañ alles		<i>je ne suis pas ici souvent</i> <i>tu n'es pas ici souvent</i> <i>il/elle n'est pas ici souvent</i> <i>nous ne sommes pas ici souvent</i> <i>vous n'êtes pas ici souvent</i> <i>ils/elles ne sont pas ici souvent</i> <i>on est pas ici souvent</i>

